

Pardon de Lannou 11th 1932

1058

Soun ar Wecherien

cf. Annales de Bretagne
t. XLVI, n° 3 et 4. 1939.
Signale par M. Delvigne
Ann. n° 1058.

A chete' pas moi
au pardon de Lannou
11 7th 1932. 1

Imprimerie ?



Tostaït tout oll da glevet
Ar zon zo nevez compozet,
A vo kanet deoc'h pen da ben
War sujet an oll wecherien.

2

Gouskoude me a c'hoar ervad
E meo outo eur goal grogat,
Pa zint tud fur var o meno,
An oll dle kemer skouer diouto.

3

En hozac'h me zo e lavar,
Er barez-ma neuz ket va far,
Na da vedi, na da falc'hat,
Na gant va c'har da chareat.

4

Eur wre zo troet da eva,
E ne zi e vanko pep tra,
E leac'h prena pep hag olen
Va gangn a lipo e gueren.

5

D'ar zul e savo abret mad
Hag a visko buan e dilhiat,
Roït din eun uguen real pe zaou,
Izom meuz euz a gals a draou.

6

Ar c'hik-moc'h en doa kuzet,
An arc'hant dei a voa roet,
Laouen ia d'an oferen vintin,
Ed a nent ne ra nemet c'hoarzin.

7

Kenta tra ra goerza an tam kig,
Eva eun, daou, pe dri bannik,
Pa nem gav e bars an illis
E voar gant anter an ofice.

8

Pa vo echu an oferen vintin
C'hevo c'hoaz meur a vane guin,
Mez dont d'ar gear vo ar goasa
Pa ne c'hell mui chom en e za.

9

Ar vugaliou er gear o voela
Hag o krial gant ar zec'het,
Hag ar vam a veo o lounka,
Kals a vilou ne reio ket.

10

A force da baka mareat lamou
E teu d'ar gear a c'hourlamou,
Tout an arc'hant a oa drebet,
C'hoaz e lavar e vo kolet.

11

Goelet vez klaskerezet bara,
Petra reont evid kaout da eva,
Losker gand an naoun da
Ar vugaliou euz an ti. [c'hlaouri

12

Ar goazet po devez evet,
Goeloc'h evito ne vez ket,
Pa gomanson da labourad
Ar zizun vez komanset mad.

13

Pa vezont dija anter vezo
E vez er c'hlabouz vraz ganto,
E kreis an ent o tekoni, [ti.
Pa deuont d'ar gear vez bian an

14

Pa vezont o c'heva ini krenv
Biken no devez eved re,
Dirensoc'h ind vid er pemoc'h,
Jamez no devez leun o c'hof. []

15

Goelit pegemen a zizurz
A vezo e nen tieges
E leac'h ma ne vo ket a urz, []
Pa ne vez na mestr na mestrez.

16

Nag a dud keiz zo malheuz []
A blamour d'ar bane guin [] ruz,
Ar pez zo kaoz euz kals krimou,
Eo alliez tout ar baneou. []

[] [EUR] KASKLAD. []